



C A N T I C EVIT DIGUERI AR JUBILE.

Var ton : Serez-vous donc, etc.

Poent e zeo déch', pec'her, }
Distrei que'h ho Salver. } *bis*

En em rentit pelloch hep appel
Da vouez an Autrou souveren ;
Pell a so e mā ons ho qervel :
Grit n'er grayo pelloch e væn.

Poent.

Penaus ! vit ur fals pliaurez
A gaver ebars et pec'het.
E fell deoc'h-hu evit ur james
Beza ouc'h Doue séparet !

Poent.

En eo hon Mestr leun a vadelez,
En eo hon Barner, hon Doue,
Hac oc'h eus c'hoas an hardieguez
Da zont d'en offanci bende !

Poent.

Anavezit hoc'h ingratiri,
Deplorit hoc'h oll pec'hejou ,
Ha demeus ho custumou impi
Brizillonit ar chadennou.

Poent.

Mar oc'h eus henillet bete vremâ
An bent rust dameus ar pec'het ,
E zoc'h ebars en danger brassé ,
Ha gouscoude ne songit qet.

Poent.

Bars en un etat qen horrerus,
E trista stat ma hoc'h ene!
Seblantout a rit beo ha joaüs,
Mes maro oc'h dirac Doue.

Poent.

Abers e justiq e veritit
Ar brassa punitionou;
Certen e goler, ma na chenchit,
Prest ho cargo a c'houliou.

Poent.

Ma tensse ar maro d'ho surpren,
Da lemel digneneoc'h ho pue,
E zai hoc'h ene d'an ifern:
Ha na songit-o qet en ze?

Poent.

Penuus bea qen disqiantet
Var sujet an tan eternel
Da bini e viot condaonet,
Mar marvit er pec'het marvel?

Poent.

Vit sortial eus hoc'h esclavach,
Grit eta hoc'h oll effortchou;
Rac mar differit c'hoas davantach,
E teui creoc'h ho chadennou.

Poent.

Ah! pec'her paour, dànvad egaret!
Perac-ta differi hitroc'h?
Hemàn eo an eürussa moment:
E inâ Doue ouc'h ho cortos.

Poent.

Na scuizit qet ar baciantet
Nac ar vadelez a Zoue,
Rac assur e viot punisset,
Mar disprisit e garante.

Poent.

Gant ur güir glae'har d'ho pec'hejou,

Deut eta buan d'e gavet :
 Un tad eo leun a vadelezou ;
 A dra sur n'ho refuso qet.

Poent.

ABARS AR GONFERANÇ PE AN TAULENNOU.

Var ton : *Venez, venez, "Esprit-Saint.*

SPERET-SANTEL. Speret a sclérigen,
 Deut.... bisitit ho cuir servicherien :
 A sclérigen carguit hor sperejou,
 A garantez tommit hor c'halonou.
 An Ebestel en ur zal assamblet,
 A dàn ho craç oc'h eus bet auflammet ;
 Bet evidomp ar memes madelez,
 Ne domp, siouas, nemet sempladurez.
 Gret deomp bremâ clêvet ar gonferang
 Gant modesti ha gant perseveranç,
 Evit disqi scléraramant ho lezen,
 Ha goude-se e miret da viqen.

Mar deo an Taulennou, e leverer.

Grit deomp compren ar pez a represant
 An Taulennou a zo amâ presant,
 Evit guelet ar stat eus hor c'houstianç,
 Ha goude-ze beza en ho toujanç,

Action a C'hraç.

Me rent graç deoc'h, va Jesus, va Doue,
 M'oc'h eus roet sclérigen d'am ene,
 Ha da veza imprimet em c'halon.

Ar reglennou eus va religion.

Grit din ar c'hraç, va Jesus, me hō'ped,
 Da bratica ar pez a meus disqet ;
 Grit din beza eur servicher fidéle,
 Ma jouissin eus ar gloar éternel.

SANTIMANCHOU AR PEG'HER PENITANT.

Var ton : *J'ai péché dès mon enfance.*

A VIANIC e meus pec'het,
 Hac offancet va Doue ;
 Va ene paour ameus lazet ;
 Ah ! pebes maleur din-me !

Piou a chencho va daoulagad
 En diou zourcen a zaelou ,
 Da implori va Doue mad
 Coleret ouc'h va c'briou ?
 Dre ur follentez insanset ,
 Hac un arrach deplorapl ,
 E zoun va-unan en em gollèt ;
 O maleur incomparabl !

Ah ! guechal e voan agreabl
 Da dri Ferson an Drindet ;
 Bremâ , pec'her abominabl ,
 E zoun esclav d'ar pec'het
 Imprimet e voa ho hanvou
 Var va ene innoçant ;
 Bremâ e zeo leun a vicou ,

Allas ! pebes chenchamant !
 la , evit un nétra , siouas ,
 E mens bet sacrificet
 Madou ha n'o devoe biscoas
 O fris etoaez traou ar bed.

O saë caer eus va badiziant !
 Ne mens biscoas comprehenet
 Ar pinvidiguezou charmant
 A bere e voac'h ornet.

Graç , va Jesus ; graç va Zalver ,
 Tenzor ar preciussa :
 Petra ha penaüs da ober
 Evit hoc'h acquisita ?

Perac , Doue oll-boissant ,
 N'oc'h eus-hu qet permetet
 E vigen , deiz va badiziant ,
 Maro , en douar rentet.

Rac neuze sur , ô va Doue !
 N'em bije qet meritet
 Coler va Mestr ha va Roue ,
 Evel m'am eus cant guech grêt.

Mignonet traitour d'am ene ,
 Va brassa ennemiet ,
 Nac a c'hlac'har a goust din-me
 Ho peza anavezet !

Teodou distrempet er poeson
 Deus ar pincin infernal ,
 C'houi oc'h eus souillet va c'halon
 bep seurt gentelliou fall.

Bete re e meus profitet
 En ho scol pernicius ;
 Bete re e meus imitet
 Hoc'h exemplou maseurus.

Bete va c'halon int bet et ;
 Evel griet int ouzin ;
 D'ho zrec'hi , va Zalver bidiguet ,
 Roit eur sicour benac din.

Deus an abimou estonet
 Grêt gant va oll bec'hejou .
 Me zavo va mouez truezus
 Da implori ho craçou.

Humiliet en ho presang ,
 Hep credi sellet ouzoc'h ,
 Eus va oll disoboissanç
 Me c'houlen pardon diganeoc'b.

Stoaet gant mez ha gant eslon
 Amâ , betec an douar ,
 E scoàn va boult var c'halon
 Dirazoc'h , Doue a c'bloar.

O va Doue ! roit d'am lagad
 Daëlou ar güir binigen ,
 Grit din gouëla a galon vad
 Va dizurziou da viqen.

Grit din en em gassât bepret ,
 Hep james en em espern ,
 Ma e'hillin beza preservet
 Diouz poanniou an ifern !

Me eo an danvad diançé

Va recevit , ô va Zad !
Me vo fur en amzer da zonet ,
Me a zistro evit mad.

Pardonet oc'h eus da Sant Pér ,
Hac ive d'ar Vadalen ;
Pardonit din , ô va Zalver !
N'oc'h offancin' mui biqen.

G A N T I C

*Var ar seize Station eus a Bassion hor Zalver
JESUS-CHRIST.*

MAR qirit ober Orëson
Da Jesus-Christ en ho calon ,
Grit peb sizun seize Station
Da gontempli e Bassion.

D'ar Sul en ho calon dresset
Da Zoue ur Jardin Olivet ;
Sellit en creiz Jesus hon Tad ,
O c'huesi an dour hac ar goad.

D'al lun en hoc'h interior
Grit da c'hloar Doue un Auditor
Savit en e greiz ur piller ,
Ma vo scourgeset hor Zalver.

D'ar meurs e guelet ho calon
Grit ur zal d'hon Roue güirion
Curunet gant ur gurunen spern
D'hon delivra eus an ifern.

D'ar merc'her en ho calon grêt
 Ur porchet , ma vo discuezet
 Gant Pilat d'ar bobl arraget
 Mab Doue , Jesus a Nazareth ,
 Gant ur gurunen spern var e benn ,
 En e zorn deo ur gorzen.

Eus ho calon leun a c'hlac'hар
 Grit d'ar yaou ur memes Calvar
 Ma vezo Jesus o touguen
 Ar groas evit ar bec'herien.

Eus ho calon leun a c'hlac'hар
 Grit oll da vener ur c'halvar ;
 Ma vo Jesus crucifiet
 Evit bon lemel a bec'het.

Eus ho calon leun a c'hlac'hар ,
 Dresset da sadorn ur c'halvar :
 Adorit Jesus gouliet
 A zo eus ar groas disqennet :
 Adorit Jesus gouliet
 E barlen e Vam glac'haret.

F I N.

E Montroulez , e ty LÉDAN , e traon tu ar Vur.